

CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ SANTEZ EODET,

GUINIBIC A ESCOPTI LEON:

Var ton Guérez Theophilus.

CClévit oll, tud yaduasq a escopti Leon,
Composet er bloa-mâ en venor da Eodet,
Ur Zantez a Leon, lervs ma zeo scifet.

A gastel Tremazan, he pares Landunvez,
Galon, un dijestilius ar c'haera dignez,
A zeuas da eureujog erit genta priet,
Metc'her Princ' eus a Vrest, Florança (voz banet).

Bugale o devoe, mes oll n'o hanvan qet b
Unan eq Sant Tanguy, oh all Santez Eodet,
O daou pa gommantent caout uzach a rêson,
Gant o mam vont ditqet da ober orêson.

Da bralica'r vertuz, chasseal ar pec'hot,
Da dec'hel diontaevel dionz serpentet,
Ar pez zo necessêr a rêa ar vugale,
Evit, goude'r maro, mont da velet Dowe.

Hoguen ar maro cris, dinatur hac ingrat,
A lamas digante o mam zantel ha mat,
A roas de, siouas, ul lesvam millignet,
Carguet eus a valiç ehrs en o andret.

Ur bloa goude maro demeus a Florança,
Galon bars e Bro-Sauz a yas d'en em renta,
Euo un demezel souden a eureujas,
Huel a galite hac eus a valiç bras.

E castel Tremazan pa voant en em rentet,
Pelec'h voa Sant Tanguy gant e oll c'hoarezet,
Souden ar vam nevez, güir lesvam leshanvet,
A gomme d'o zreti evel un drouc-speret.

Nemet ar blasphemou ha mallosiou infam
Na gléo an daou yugel a p'henou o lesvam;
Evel torfetourien ouспен hi o c'hanne,
Hep nep respet d'o zad pini e zamalle.

Sant Tanguy alafin o tont d'en em squiza,
Goude eiz bloas hemdez het t'retet e c'his-ma,
Gant copie mad e dad e yas prest da Paris,
Evit ouz e lesvam t'evita ar valic, ar soldat Jacques.

Criz vije ar galon na zowjeda ouela, e s'asas
O velet Sant Tanguy o tont da gimiada
Dioz Santez Eodet, e c'hoar annil caret,
O façou de o daou gant thelow gollet.

Pensat, ray, sour Tanguy, Vene Santez Eodet,
E teuit d'ar dilezet da veba bourreviet,
Mes n'ouffin p'oret, ar tontomp hon d'adec
Geell eave ma souffren eguec souffren daou.

Sant Tanguy o ouela, na elle get parlant,
Gant truez touz e c'hoar, e gar parfetamant,
E galon gant glac'har a re dazi ranant,
O clévet ar c'homzou euse c'hoar Eodet.

Allas! Eodet, bremàn detu c'honi oc'h-unan,
Ruillet viet hemdez dre gasket Tremazan
Gant an treid m'illiguet eus ar bleizes infam
Zo couet deoc'h o partach elec'h un güir lesvam.

Eodet, goude heza ouz e breur gimiadet,
A bromet da Zeuc souffir gant patientet
Eus abers e lesmam un oll insolarcon,
O respeti, senti, hep clasq nep resomou.

He lesmam, er c'hontrot, a redoubl a valic,
Dre moyenou nevez e zourmant e pep guis,



O velet e care vaqi d'an oréson,
 Evit dont d'e ampech, c'etu ama'r s'eson.
 Daru he demézetet ha servicheezet
 A gassas en o' h'ent evit caont ur séjet
 Da ober da Eodet labourat incessamant
 Er c'hamprou, er g'éguin, hep dezi nep damant.

Dirac he orator bars eu e c'habinet,
 Oc'h ober oréson alies voe cavet;
 Mes he lesman' méchant q'ementse pa santas,
 Orator, cabinet, tout en o' ranversas.

Pa sonet er chapel ar c'hloc'h d'an oleren,
 Pehini a gare da glévet peti-da-bén,
 Labourat er g'éguin ha q'erc'hat ar oll dour,
 Neuze e oblije, hep réi dezi sicour.

Ouz he z'ed, he lesman', biscoas ne voe disent;
 Gant respet bras e ré q'entent a ord'ement:
 Pa ne alle en deiz vaqi d'an oréson,
 An darn brassa en nos er ré a vir galon.

Gant av'is he director e'promet da Zoue
 Birvigen, emez, p'ried he dévije,
 Evit ehout beindez s'ohjal er bassion,
 A voa sur, pa' elle, e' occupation.

Gant he man' Floranç'a e' devoa bet disqet
 Donet da soulaji' ar beorien ezomet.
 Calz eus he repasiou goude a rezerve,
 Hac hep gont d'e lesman' deo racial er c'hasse.

Un devez, dre'goal'chang, e' rancontras Eodet
 O cass an aluzen d'ar beorien ezomet,
 Hac eno var ar plac' gant outrach-e' c'hannas,
 Ha bara ar beorien gant a z'reid a flastras.

Goude'r beza' b'fesset, d'ar chass prest en tolas,
 Eu despet da Endet, da Zoue e' c'hroas,
 Ar Zantez patiant, hep tavaret ur guer,
 A retorn d'ar c'hastel da off' oll d'hor Zolver.

Caer e d'oa he lesmam dont d'e persecuti,
Na fallout qennebeut dont d'e aneauti,
Ar brud eus he vertuz partout a voa scuillet,
A denne an noblang da zont oll d'e gullet.

O velet qementse, e arrach a gresqe,
Pa velas an noblang a guenta qualite
O tonet d'e reglasq evit e eureuji,
Hac a hep avantach o tont d'e assuri.

Bete bremàn Eodet zo bet indifferent,
Oll qement tra a zouffr a zouffr hep nep damant;
Mes dont da zemezi bigen na gonsantje,
Goude rei da Jesus e c'horf hac he ene.

Er feçon-mâ dezàn ec'h adress e seden :
Jesus, va güir bried, permetit e varfen
Qent eguet birvigen terri ar bromessa
Pini ameus great deoc'h hac a ratifiàn.

Maliç eus he lesmam a servichas dezi
Da ampech ma rancche donet da eureuji,
O velet ezedo en un estim qer bras,
Prest pell diouz ar c'hastel var ar meaz e c'hasas.

Eno en un tyig, hac en meurbet dister,
Bemdez e orézon a offre d'hor Zalver,
Ha calz a œuvrou-mañ bemdez a exerce
En andret peb-unan ha guella ma elle.

Calz a blac'het yaouanq a voa bars er c'hanton
Dre e scol, e exempl, touchet en o c'hulon,
A renonças a grenn da vaximou ar bed,
En em roas da Zoue dre garantez barfet.

Erfin he breur Tanguy a Baris distroet,
E castel Tremazan prest eo en em rentet,
Hac hep e anaout er zal voe conduet,
E pelec'h ma yoa calz eus a zemezelet.

Ha pa voe gant an oll gant respect saludet,
Souden e c'houlennas pelec'h edo Eodet;

Qer buan e lesvam en feunas a gostez,
E sônjal e c'blasque evit ober al lez.

Neuze an draitourez a lavaras dezân :
Côves ar virionez ouzoc'h a zezirân ;
An demezel Eodet a zo ur plac'h collet,
Zo ur prostituët a guement a gafet.

He obstination, he buez debordet
D'he c'hass var ar meaz en deus hor c'hontraignet.
E clasq, allas ! golo gant guell facilitate
Maleur un demezel demeus e c'halite.

O credi re vuan, Tanguy a zortias,
Gant coler ar brassa e c'hoar paour a gavas
E qichen ur feunteun e voelc'hi he dillat,
Evel ma er guelas en e galvas timat.

Eodet pa er c'hlêvas a gommanças tec'het,
Rac ma zoa ganti oll neuze dianavezet ;
Mes én ouz e foursu qerqent prest e zrapas,
Ha gant un tol cleze a grenn e dibennas.

P'oe couezet d'an douar, o velet he bruchet
Carguet a lêz-caoulet hep gouzout ar sujet,
Diouz an amezeyen neuze n'em informas
Eus a vuez Eodet, ar pez en estonas.

An dud oll glac'haret, a lavaras dezân :
Bebet e deus Eodet assur bete vremen
Gant peb seurt santelez, exempl vad er c'hanton ;
Glac'har hon eus dezi eus a greiz hor c'halon.

He lesmam cris, allas ! e deus-hi chassee
Eus a gastel he zad hac amân banisset
Gant peb seurt paourentez, al lêz oc'h eus guelet
Da zoulaji ar paour e cus voa destinët.

Pa en devoa Tanguy ar virionez cliêvet,
E voa dare dezân mervel gant an despët,
Gant queuz en e galon d'e beza dibennet,
O credi re vuan e lesvam connaret.

D'ar c'hastel e tenas d'ar gaout e dad Galon,
 En eur scuilla daelou éus a greiz e galon,
 Pa autreas er zal e dad a rancontras,
 Qer buan d'an doulin dirazan n'em stringas.

Eno e tislérias : me eo ho mab Tanguy,
 A verit ar miero, hep cadu, hep damant dir.
 Allas ! siouas, allas ! va t'hoar ntuya caret
 Gant un tol a gleze ameus bet dibennet.

E vouela da Eoder pa voant eno o daou,
 Al lesvam voa en joa gnefet oll e canvoü ;
 Souden e creiz ar zal Eoder a autreas,
 He sein en e daouarn eno ec'h apparissas.

Eno var e gouzoug e leun a apphigas,
 Hac evel diagent outi eñ em stagas,
 Qerqent ouz he lesvam e tro publicamant,
 Hac evelen outi e commancas parlant :

Pep tra oll er bed-mañ en devezs e amzer ;
 Doue betec ur pient a zouffr gant ar pecher,
 Ho malic en devezs souffret bete vrema,
 Ena o prepari donet d'ho punissa.

Adieu eta, lesvam dinatar hac ingrat,
 Deut eo an tieur brema deomp d'en em guiltat ;
 Great eo ac'hano'h, prest eo coler Done
 Da guezá var ho penn pad ar eternite.

Ur c'hren den vlsfant eno e t'hemetas,
 He antraillou couezet gant he zreiz a bressas,
 Erfin gant e arrach d'an douar n'em stringas,
 Hac evel ma velot he buez a finissas.

Aziouc'h ar c'hastel ar gurin o trouzal,
 A zeuas da spona qement a voa er zal,
 Qer buan o coeza e crevas an hoen,
 Hac hep ofanci den he losgas pen da ben.

An dul oll estonet a deuas da grena,
 O velet un Itron demets a greiz e joa

Ebars en un instant e ludu voe rentet,
Allas ! hac he ene livret d'an drouc-speret.

Incontinent Eodet ouz he breur a droas,
Hac ounta publicamant evelen a gomzas :
Pa em guelloc'h, va breur, me n'oc'h anayen get,
Ar pez a roas din guir sujet da dec'het.

Mes cuzul hon lesvam a oun ervat brema
Eo bet deoc'h ar sujet da zont d'am dibenna,
Ha rac se ar Verc'hes meus pedet a galon,
Da c'houlen evidoc'h digant Doue pardon.

Qer huan d'an daoulin Tanguy en em strincas,
Ouz e c'hoar a galon pardon a c'houlennas ;
Pardon, va c'hoar, pardon d'o peza massacret :
Va c'halon gant glac'har a zo qazi rannet.

He oll sacramanchou goude a recevas,
Hac ebars un instant adare e varvas ;
Neuze gant an ælez d'an ên voe cunduet,
Endra hado Doue, da veza curunet.

He c'horf goude a voe enterret gant enor
E pares Landunvez peurdost da vord ar mor ;
Eno e deus great calz eus a viraclou,
Aboa voa he ene er gloar eus an ênvou.

Perac, oll tud yaouanq, coulz ha Santez Eodet,
Ne zentit ouz ho tud, renta dezo respet ?
Perac ne andurot, pa e deus anduret
Gant ul lesvam gruel a guement a galet ?

Perac diouz ar pec'het hac an occasion,
Na dec'het coulz hac hy hac ober orëson,
Pa zeo guir ar Verc'hes rac an æl a spontas,
Ha Santez Eodet rac he breur a dec'has ?

Perac, pa zoc'h fragil evel m'eo ur pod pri,
N'ho pezo get a spount hac er m'ez hac en ty ?
Rac an occasion da goueza er pec'het,
E sot tec'hel ounti calz a dud zo daonet.

E chom re dost d'an tan e, teuer d'en em boazat,
 E chom dindan ar glao en em g'lehier timat,
 E vit en occasion na guessel er pec'het,
 N'oun nemet tri remed : tec'het, tec'het, tec'het.

Tec'het prest... ar maro hemdez a didosta,
 Mar guell ho surpréno pa sonjoc'h nebeuta,
 Calz eus a dud yaouanq oc'h eus anavezet,
 Hac a greiz o yec'het he deveus discaret.

Queuz ho pezo neuze lot da veza lieuillet
 An exempl a vertuz eus a Zantez Eodet,
 Commancit la bremâ da veva evelti,
 Hac e viot en ên curunet coulz hac hi.

Pelloc'h eta, pa viot gant ho tud goal drêtet,
 Ouz castel Tremazan troit prest ho speret;
 Gant he lésman eno petra souffras Eodet;
 Sonjit ha grît evelti, gant Doue viot paeet.

Ar verz-ma zo dediet da yaouanqis Leon,
 E pini, mar qeront, e cavint ar léçon
 Da braticar vertuz, caret Doue a galon,
 Dre exempl ar Zantez bevet en o c'hanton.

Itron Santez Eodet, hezit advocadez
 Da yaouanqis Leon, heuilla rint ho puez
 Oll guella ma ellint en amzer da zonet,
 Cetu amâr c'hontrat ganto oll goarantel.

Etrezomp, tud yaouanq a escopti Leon,
 Pelloc'h e promettomp demeus a guir galon
 Imita ar vuez eus a Zantez Eodet,
 E vit goude'r maro mont d'an ên d'e guellet.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.